


## KANTIK SANTEZ MAC'HARIT

RENKET A NEVEZ



Refrain



O Ma - c'ha-rit guer - chez, guer-chez ha mer - ze -




rez, euz ho tron en En - vou, grit d'hor bu - ga - li -



gou kres - ki var an dou-ar 'vit Dou-e hag he c'hloar.

1<sup>er</sup> Couplet

Euz a eur ouenn a ba - ya - net San - tez Ma -



c'ha - rit zo ga - net; mez a - bred eo bet



he e - ne euz a ouenn bu-ga - le Dou - e.

DISKANN :

O Mac'harit querc'hez,  
Guerc'hez ha merzerez,  
Euz ho tron en Envou,  
Grit d'hor bugaligou  
Kreski var an douar  
'Vit Doue hag he c'hloar.

Euz a eur ouenn a bayaned  
Santez Mac'harit zo ganet ;  
Mes abred eo bet he ene  
Euz a ouenn bugale Doue.

Var ar meziou e vez gullet  
Bleunioù alaouret, arc'hantet ;  
Pa gouez, en anv, gliz an Envou,  
E tivoanont a villierou.

Mac'harit, en Iliz santel,  
Zo divoanet quella bugel,  
Da rei meulenti d'an Dreinded  
E renk gloriuz ar Guerc'hez.

Var ar feiz kelennet e kuz,  
(Ra vezo meulet he vertuz !)  
Dirag he zud, dirag ar bed,  
Er feiz e chomas stard bpred.

En dro dezhi, paotrez vihan,  
Ne vele nemet tud payan ;  
Mes he c'halon holl da Zone  
N'he doa ken c'hoant nemed an Ee.

Gant yaouankizou fall ar bed,  
Morse ne réas darempred ;  
Euz ar blijadur, an henor  
E kasse dlouthi peb envor.

Evelse kuzet er prajou  
E ehom freskoc'h ar bokedou ;  
Plijout a reont d'an daoulagad ;  
A bell e taolont ho c'houez vad.

D'an holl ma plij bugale fur,  
Satan n'ho c'har ket, a dra zur ;  
Ea dro d'ar bed e c'houez brezel,  
Da zivoenna an dud santel.

Fuloret tad Marc'haridik  
O velet he feiz birvidik,  
Heb truez ouz he vugel kez  
Euz he di he zaolas er mæz.

Ah ! n'euz na ti, na mamm, na tad ;  
N'euz ket er bed-ma eun holl vad ;  
Aounik braz rag ar pec'hejou,  
E ped he Zad zo en Envou.

En han' Doue he magerez  
He lojas en he ziegez ;  
Eno ar plac'hik oa karget  
Bemdez da zlouall an denved.

Ma oa an denved dous ho mouez,  
Doussoc'h oa hini ar zantez,  
Kel liez guech ma lavare  
Eur beden devot da Zoue.

Ar Verc'hez, ar zent, an elez  
He galv da zont en ho zouez.  
Prestik 'Iugerno var he fenn  
Kurunen gaer ar verzerien.

Ar zent, en ho c'hurunennou  
N'ho deuz ket ar memez bleunioù.  
O Merzerez, en hoc'h hini  
Ne vanko na roz, na lili.

Prizoun, tan, kleze, dour-bero,  
Evit he lakât d'ar maro  
Gant he bourrevien kounnaret  
Goassoc'h goassa zo pourchasset.

He barner a lavar dezhi :  
« Em falez, mar kares senti,  
Te vo savet d'eur renk huel ».  
— « Nan ! emezhi, guelloc'h mer-  
[vel ! »

Satan, dre spontailloù mezuz,  
A glask deseo pried Jezuz ;  
Mes hi, 'n eur ober sin ar groaz,  
Treaç'h d'an enebour a jomas.

Guelit skedussa sklerijen  
O para tro var dro d'he fenn !  
En he frizoun, sent hag elez  
A zalc'h dezhi kompagnuez.

Da dud divadez ar zantez  
A zisplegas ar virionez.  
An dud a gred, zo merzeriet,  
Hag he unan zo dibennet.

A denn askel, ar goulm euruz  
A nij betek Kaloun Jezuz.  
He gloar, he vertuz, he gened  
Da viken dezhi vo miret.

Var an douar kanomp dezhi  
Eur c'hantik leun a veuleudi ;  
E Logonna, en he chapel  
Kanomp, kanomp a vouez huel.

Deut, tadou ha mammou kristen ;  
Var ho taolin, grit ho peden.  
Diboan e veloc'h ho pugel  
Eun deiz yac'h pesk en he gavel.

Nag eun dra brask eo bugale !  
Red eo varnho beilla noz-de.  
Mac'harit sur ho sikouro  
Da gass pep drouk divar ho zro.

Na breskoc'h c'hoaz eo eun ene,  
Fiziet ennoe'h gant dourn Doue.  
Aman, gant ar grassou skuillet,  
Ar yaouankiz a zo miret.

Labourerien ha tud a vor,  
En ho kichen a zo digor  
Eur chapelik ganeoc'h karet,  
Da Zantez Mac'harit gwestlet.

C'houi, kristenien euz Logonna,  
C'houi holl a zeu da bardona,  
Vel he tud koz, bezit fidel  
Da rei aluzen d'ar chapel.

IMPRIMATUR :

Kemper, 2 a viz Kerzu 1913.

A. COGNEAU, v. g.

